

GENOVEFA HA BENONI,

PEDIT DOUR EVIDOMP-NI,

7

142 H  
H



Ma ellimp oll mont un devez

D'ho cavet etouez an Allez.



BUEZ  
SANTEZ GENOVEFA  
A VRABANT.

*Var an ton ordinal.*

**M**E ho suppli, compagnunez,  
Da glêvet cana ur vuez,  
Da Genovefa e zeo grêt,  
Melezour d'an itronezet.

A Vrabant e voa guinidic,  
A lignez nobl ha pinvidic,  
Christenien vad e voant ive,  
Guir servicherien da Zoue.

Pa voa en he bugaleach,  
Hi a gartie an ermitach;  
En ur c'horn a jardin he zad,  
Nemet eno n'em gav ervad.

He mam ous he c'honsideri,  
Un deiz a c'houlennaz outi:  
Penos, va merc'hic ermites,

Ha ne deuet-u qeu d'ar pales?

Va mam, e cornic ho jardin  
 Me a meus ur boqet divin :  
 M'em eus eno ur melezour,  
 An Antrou Sant Yan-Badezour.

Alias ! va merc'hic, emezi,  
 C'houi n'en doc'h qet evit souffri ;  
 Ebars en dezert e zeus poan  
 Ne andurfac'h qet, a gredan.

Caeroc'h eguet fourdelizen  
 E voa'r plac'h-mâ a dra certain ;  
 Qen a deuet da vit e fortret,  
 Da gass d'an noblanç da velet.

Ur Palatin, Siffroi hanvet,  
 He renome en deus clêvet,  
 Hac a zisqennas e Brabant  
 Gant un equipach excelant.

Ractal vel ma voe êruet  
 E ty he zad en em rentet,  
 En eur bresantas er pales,  
 Saludi'r Prinç hac ar Brinces.

Goude o beza saludet,  
 E menuat en deus goulennet,  
 Ma vije ar Brinces yaouanq  
 Qent eguet monet a Vrabanet.

He zad dont da gonsideri  
 E voa avantajus ar parti,  
 A roas carg d'e mam neuze  
 Da c'hout nac hi a zemeje.

Va merc'h, prest en em breparet,  
 Eru zo ur Prinç d'ho quelet,  
 Ur Palatin a voad huel,  
 Qender-gompes d'an Impalaer.

Me ne meus nemet seitec vloas,  
 Ha dre ze oun yaouanq c'hoas;  
 N'en d'onn c'hoas nemet ur buguel  
 Da vont e suit un Impalaer.

Evel an eol pe ar c'hristal  
 Ec'h antreas ebars er zal;  
 Ar Palatin zo estonet,  
 O consideri ne guenet.

Gant honor lia perseverant,

Oc'h eure dezàn ar reveranc ;  
 He furnes hac he modesti  
 A voa meurbet d'e fantazi.



Mes pa voe parantet dezi  
 Ar ar sujet da zemezi ;  
 E chench a liou he bizach ,  
 Ar Palatin en remercas.



Ne ouffe den consideri  
 Eguement a velancoli  
 E gonserve ar Palatin ,  
 Ant aoun caout refus diouti.



Ur mis anter e zeo padet  
 E lemniteou an eured ,  
 E zonnerrien , ar bal , an danç ,  
 E gaitou bemdez gant noblauc.



Siffroi , c'houi oc'h eus eureujet  
 E gaera demeus ar merc'het ,  
 E bit monet ganeoc'h d'ho ty ;  
 E bouallit n'e dese anui.



Birvigen anui ne devo ,  
 E bit quit a ma veria beo ;

Ne qet evit cavet anui  
 He goulenñan da zont d'am zy.

Siffoi o veza preparet  
 Da vont da Treves gant e bried,  
 E voe gant e dad recevet  
 Gant calz a joa hac a respet.

Daou vloavez anter ez int bet  
 Hep beza gant netra tourmantet;  
 Bras e voa ar fidelite  
 A voa entre'n daou bried-se.

Qen a deuas Abderame,  
 Un adversour bras d'ar Roue,  
 Da brometi a dra certen  
 Massacri an oll Gristenien.

Biscoas distruch a zoudardet  
 Evit ur vech na voe guelet;  
 A dal Sodom ha Bethsabe,  
 Bete Tour e pad an arme.

Tri ugent mil a zoudardet,  
 Ha daouzec mil ha zragonet,  
 A voa gant Martel dirac Tour,

7  
Ha c'hoas e c'houlenne sicour.

Scriva a eure d'an noblañ  
A Alamagn, a Spagn, a Franç,  
Dont d'asista Charles Martel,  
A voa general er brezel.

Siffroi, unan ar re vrasa,  
A varche ive da guenta,  
Hac e voe dezàn discrifet  
Monet gant an Allamagnet.

Siffroi al lizer pa velas,  
Genovesa a gonfias,  
E dieguez, e oll vadou  
D'e gonfidant, hanvet Golo.

Neuze, pa voe prest an arme,  
E partias en han' Doue,  
Hac e voe gant Martel recevet  
Gant calz a joa hac a respet.

A drugare an Eternel,  
È deut ar victor gant Martel :  
Abderame so bet lazet  
En Tour, hac e oll soudardet.

Pa voe achu ar gombat-mâ,  
Da velet e Genovefa  
En devez digasset Siffroi  
E zigentil, hanvet Lanfroi.

Itron, ceta amâ qélou,  
Lizerou digant an Autrou;  
Er paqad e zeus ur present  
A dal ur som bras a arc'hant.

Lavarat a ras d'an Itron  
E z'en Autrou da Avignon  
Ha da Narbon, vit gemeret  
Roue bras ar Sarasinet.

Evel ma clévas qementse,  
E zê c'hoas e goas d'an arme,  
E scrifas huan dre Lanfroi  
Ul lizer gouall drist da Siffroi.

C'houi, Siffroi, a so en arme  
En danger bras eus ho pue;  
Mes ho Genovefa a so  
E qen bras danger gant Golo.



Penevert n'em eus get a e'hoant  
 Pronouci comzou insolant,  
 Me lavarfe ar proposion  
 A glêo an Itron gant Golo.

Golo a voa un Intendant  
 A voa hernde comunamant  
 E compagnunez an Itron,  
 En despet d'be ompinion.

Tol eves, papillon bian,  
 Rac na vez losget gant an tan,  
 An tan eus an impurete,  
 A so e calon nos ha de.

Ma sonchfes en devotion  
 Hac en modesti an Itron,  
 Ne laqafes get da speret  
 Da garout nep na caro get.

Pa vel ersat ar mechant-màn  
 N'el get deceo ar Brinces-màn,  
 Ar soupçon en deveus songet  
 Laqat en calon he fried.

Amã eo goele! an impi  
 O commanç c'hoari e dragedi;  
 Ember e velfot, christenien,  
 E dreitourachou pen da ben.

Ur c'heguiner a voa en ty  
 A bel a voa o servichi,  
 Ennes a garre an ltron,  
 Balamour ma voa den güirion.

Rêi a eure an Intendant  
 D'ar c'heguiner commandamant  
 Mont d'e c'hambri, pa vije cousquet,  
 Hac e laqat o c'hemeret.

Caer o doa'n daou inoçant-se  
 Qemer an douar hac an êe  
 Da zonet eno da destou  
 Eus a dreitourizou Golo.

Allas! allas! ons ar gibet  
 Mervel, paour qez, a vezo ret:  
 Ni a rai pinigen hon daou  
 Eus a dreitourizou Golo.

Qemeret voe ar C'heguiner ,  
 Hac en laqueat prisonier ;  
 Genovesa a voe laquet  
 Ebars eu ur gambr alc'huezet ;  
 Eno e combate ounte ,  
 Abalamour d'ar chastete.

Scrifa ra Golo lizerou ,  
 Ha cass messenger d'an Autrou ,  
 Da lavarat voa decevet  
 Gant ar C'heguiner e bried.

Scrifa a eure an Autrou  
 Da laquat Drogan d'ar maro ,  
 Laquat Genovesa ive  
 Er prison , qen na arruje.

Pa voe bet pemp mis er prison ;  
 Neuze' voüilloudas an Itron ,  
 Hep sicour , na goulou , na tan ,  
 Hi a c'hanas he mab bian.

Incontinent ma voe ganet ,  
 E gristenen e deveus grêt ,  
 Gant aon na varvje diganti ,  
 Hae en e banvas **BENONI**.

Bevel eure Golo ar i rad  
Communamant etouez an dud,  
Penos Siffroi a voa heuzet,  
O sonjal eavet e bried.

Cass a eure e vaguerz  
Da c'houlen digant ar Brinces,  
Ma carje dont da eueujt,  
E roje liberte dezi.

Ar Zantez a voa qelennet  
Gant ar Rouanez eus ar bed;  
Ebars er gambr pa antreas,  
Ur façad dezàn a roas.  
Lunes eo sur al lealdet  
A poa da Siffroi prometet.

Ma vijes fidel, emezi,  
Pa voas laçet da vestr eui zi,  
Te a vije recompanset  
Pa vije êru ya fried.

Êruout a ra lizerou  
E tistro d'ar guër an Autrou;  
Pa glêo Golo e teu ar C'hont,  
E za da Strasbourg d'e racont.

Mont a ra da dy ur sorcerez,  
 Hac a voa c'hoar d'e vaguerez,  
 Ha ròi dezi aour hac arc'hant,  
 Qement gen a vije contant.

M'em eus ur mellezour ardant,  
 Eme ar sorcerez mechant,  
 Hac a rañ da Siffroi guelel  
 Ar pezh n'enñ deo qet c'hoarvezet.

Pa voe sur demeus e affer,  
 E yas joaüs ehars e qêr,  
 Ma voe gant ar C'homt recevet  
 Gant calz a joa hac a respet.

Neuze en tennas a gostez,  
 Da c'hout outàn ar virionez  
 Ar ar sujet eus e bried,  
 A rent e galon contristet.

Golo a lavaras dezà :  
 Ne douetit qet, emezà,  
 Demeus he infidelite,  
 A so prejudiq d'ho pua.

Ouspen, eme an den mechant,  
 Me anavez ur vreg vaillant,  
 A zisquezo en ho presañç  
 Qement zo grêt en hoc'h absañç.

Siffroi neuze ouz e glêvet,  
 A zo contantet e speret  
 Evel darn eus ar gristenien  
 O tont da gredi sorcerien.

Monet a rejont assambles  
 O daou da gaout ar sorcerez,  
 En un toul dindan an douar,  
 Elec'h na voa nac eol na loar.

Ar Sorcerez a alumas  
 Diou c'houlaoueu gaer a goar glas,  
 Leis ur bezel demeus a zour,  
 Laqat enna ur melezour,  
 E ra dezàn teir guech guelet  
 Ar C'heguiner gant e bried.

Neuze ec'h ordren da Golo  
 Da vont d'e laqat d'ar maro,  
 Hi hac e mabic Benoni:  
 Ro dê ar maro a guiri.

Golo , sur demeus e affer ,  
 A retornas joaüs d'ar guær ,  
 A lavaras d'e vaguerez :  
 Grêt ar vech-màn eus ar Brinces.

Roet e setañ gant he fried ,  
 Evit ma vezo distrujet ;  
 Si hac he mabic Benoni  
 A varvo sur em fantazi.

Ur plac'h yaouanq a voa en ti  
 Et verc'h dezi o servichi ,  
 Touchet eus a gompasion ,  
 A yas da gavet an ltron.

Allas ! emezi , va Mestrez ,  
 Grêt ar vech-mà eus ho puez ;  
 Neut e ar setañ gant Golo  
 Evit ho laqat d'ar maro.

Lavarit din , va mignonez ,  
 Tra vo grêt d'am buguel qez !  
 Allas ! va Mestres , emezi ,  
 Marvel a rai , qercoulz ha c'houi.

Va mignonez , mar ar e'heret ,

Grit ur blijadur em reget :  
Digassit din liou ha paper,  
Evit ma skrivin eul lizer.

Evit ma skrivin eur billet  
Da laret adieu d'am pried ;  
Pa vezo Golo o'coania,  
C'houi allo donet davinta,  
Hac e deuler em c'habinet,  
Eur c'houlz benac e vo cavel.

Adieu, emezi, va fried,  
Me ya d'ar maro en ho reget,  
Biscoas n'em eus grêt resistanc  
Da zouffri d'oc'h oboissanc.

Rêy a eure an Intendant  
Da zaou vevel comandant  
En ur c'hoad monet d'o laza,  
Ha da zigas e zeod deza.  
Sevel a eure gent an de,  
Ha cass ganta an daou den-ze.

Pa voent aruet er prison,  
E voe divisget an Itron,  
E rojont dezi var e zro



Ur gos vantellie d'he golo.



Pa voent êru ebars er plaç,  
Unan a denn e gontel noas  
Evit laza he Benoni,  
Voa etre e divrac'h ganti.



Ne devoa lavaret guer ebet,  
Neuze e commanças prezeg;  
E za d'an daoulin diraze  
D'o supplia, en lan' Doue,  
He laza gent vit he buguel,  
Ne ranqje get diou vech mervel.



An daou zervicher, gant truez,  
A lêzas gante o buez;  
Ha goude o zrugarecat  
E'h antreas don en ur c'hoad.



En ur rivier a dremenas,  
Diamant Siffroi a daulas  
Da redec gant an gour coulant,  
Pa voa caus deueus e zourmant.



Evit, amezi, n'am bo get

E nep fêçon poan o velet  
 Ar merq-se eus hon union,  
 Epad hor separation.

An diou nos qenta e zeo het  
 Dindan' an derven o cousqet ;  
 Hep souffri' na poan na annui,  
 Nemet damant d'he Benoni.

Un drue bras voe e c'hlêvet,  
 Pa en em gavas dilezet.  
 Allas ! emezi, va buguel,  
 Er vech-màn e ranqi mervel.

Guerc'hes-Vari, petra a rin ?  
 Ne zeus mui a lèz em peultrin !  
 Ne deu gantàn nemet ar goad,  
 Ne gav mui ur strill a lèz mad.

O va Doue oll-buissant !  
 Ho pet soign eus an inoçant ;  
 Roit dezàn ar mân da zêbri,  
 Vel ma roit d'ar marvrini.

Neuze e tisgen ar Verc'hes.

Er c'hoad da gavet ar Zantez  
 Da zigas dezi un heizez,  
 A voe d'ar buguel magueréz.



Quemerit ho mabic christen,  
 Ha deut da guichen ar feunteun:  
 Cetu amàn d'c'h un heizez,  
 A vezo dezàn magueréz.



Ar bleizi, al loened mechant  
 A voe dezi oboissant:  
 Bemdez e teuent d'he adori,  
 Ha da renta bizit dezi.



Er c'hoad e voa ur porc'hel goez  
 A deue d'e guelet bemdez,  
 Da duriad an douar dezi,  
 Da gavet qeler da zêbri.



Pa voe an daou vloas tremenet,  
 Un Æl a zo deut d'e guelet,  
 Hac a ro dey ur groas arc'hant,  
 Hac ur grucifi olifant.



Courach, va merc'h, na squizit qet,  
 Un deiz e viot delivret:

Preparet so ur garunez  
 A yélo eun deiz var ho peñ.

Pa voa ar pemp bla tremenet,  
 Da oüela eo en em laqet  
 Var be daouliu dirac ar groas,  
 Evellen outi e comzas :

Penos, emezi, va Doue !  
 Hac er c'his-màn e chomin-me ?  
 Ha ne de get aoualc'h pemp bloas  
 Da veza het er poanniou bras ?

P'am be tanet hoc'h ilisou,  
 Pe ranverset hoc'h auteriuu,  
 Em bije ho coler apezet  
 Gant an daelou a meus scuillet.

Petra, va Doue, a meus grêt  
 Da veza crenn abandonet ?  
 Dija e meus anconac'hêt  
 An usach an boa da brezeg ;  
 Mes muya tra a gresq va foan,  
 E zeo va buguelic bian.

Ar grucifi, dre viracl bras,  
 Evellen outi a gouzas :

Ha me, va merc'h, peira me s grêt  
Da veza en ur groas staguêt ?

Guir eo ho mab a gresq ho poan,  
Va hini n'en deo get bian  
Guelit va Mam, Yan, Madalen,  
Rannet o c'halon em c'hichen.

Cetu ar Zantez consolet  
Gant ar voez a Zalver ar bed :  
Ne c'houlén mui nemet poaniou,  
Hac ar c'hruella tourmanchou.

Pa voa un devez an Autrou  
O sellet ouz e baperiou,  
Ec'h erruas gant ar billet  
En devoa scrivet e bried.

Na ouffe den consideri  
E c'hlac'har, e velancoli :  
Tost e voe d'e galon ranna,  
Pa lennas an tam paper-mâ.

Siffroi n'en deus mui a repos ;  
Na elle cousqet na deiz na nos  
Gant ur voez a lavar dezân :

Te so un den ar c'hruella;  
 Te c'heus lazet da vab ena,  
 Ha Drogau ha Genovefa.

En em laqat a ras expres  
 Da vont d'ar chasse un devez,  
 Ha ma rancontras un heizes  
 En rentas e coad ar Gontes.

Er c'havern eo en em dec'het,  
 Adrén qein ar Zantez cuzet;  
 Siffroi a voe estonet bras,  
 Form ur femelen pa velas.

Pa velas form ur femelen,  
 Hac un heizes en he c'hichen,  
 Ur voëz a lavaras dezàn:  
 Siffroi, Genovefa houmàn.

Petra oc'h aze er guiz-se,  
 Er form-ze gant al loënet goue?  
 Me zo ur vreg eus a Vrabant,  
 A zo seiz vloas so en tourmant  
 A zo seiz vloas so retiret,  
 Gant aon rac coler va fried.

Greg a Vrabant, din leveret

Ac'hanoc'h-hu pe hano a rêl?  
 Genovefa e voan hanvet,  
 Ur palatin voa va fried.

Cris vije'r galon na ouelje,  
 Tost d'ar c'havarn nep a vije,  
 Guelet ar Princ hac ar Brinces  
 Ha semplet o daou assambles.

Ha pa voent o daou dizemplet,  
 Ar Princ goulen dious e bried:  
 Pelec'h e m'ân ar c'hrouadur  
 En deus un tad qen dinatur?

Siffroi, beo eo, dre c'hraç Doue;  
 Cetu e vaguerz, aze.  
 Incontinent pa zistroas,  
 En e guichen en er c'havas,  
 Hac un dornat qeler gantân:  
 Do rêi d'e vam evit leina

Ordren a ras d'e vevellou  
 Mont d'ar guêr da vit abijou,  
 Hac ar c'haros eqipet mat,  
 E'it donet prest d'o c'herc'hat.

Bevet o deveus assambles

Ur bloas gant calz a zantelez,  
 Genovefa a zecedas,  
 Ar Prinç hac e Vab a chommas.

Ma ejout o daou assambles  
 Da dremen ar rest o huez  
 Er plac ma yoe Genovefa,  
 D'ober pinigen ar vrassa.

Genovefa, ni ho suppli  
 Da gavet sonch ac'hanomp-ni;  
 Troit divarnomp an teir goalen:  
 Brezel, qernez hac ar vocen.

*Amen.*

